

Ar Spilhenn.

Ya, gad eul lommig gwin gwenn
Bete hanter va gwerenn,
War beg eur spilhenn e raien
Eur zon keid hag eur walenn:
Chetu va lommig gwin evet,
Chetu va zon komafset.

C'hwi oll pere a ra spilhou
Hag o renk a gouchadou;
C'hwi oll pere dre ar foariou
A ren, a werz, a bren spilhou,
Sikour! C'hoant a zo e raien
Eur son war beg eur spilhenn.

Pourmenit dre an oll broiou,
E pep leah eus spilhou;
Spilhou aour, spilhou arhant,
Spilhou war alhuet livet koant,
Ha spilhou braz, ha spilhou krenn,
Spilhou du, spilhou melen.

E pep ~~xxxxx~~^{stad} hag e pep amzer
Ar spilhou zo neseser;
D'ar varkizez, d'ar rouanez,
D'ar baourez kēz artizanez,
En noz kerkoulz hag en deiz,
Er hozni, er yaouanktiz.

Pa ~~z~~ a Janedig d'an dañsou,
Raktal e klask he spilhou;
En he hoef e laka peder,
Ha teir en he mouchouer;
En he brennidenn e laka
Spilhou, spilhou heb konta.

Awechou oll labour an den
A zepant diout eur spilhen;
En ho taouarn pa vez eun dr̄en
E karfah e lammed souden;
Gad petra e lammed an dr̄en,
Nemed gad beg eur spilhenn?

Karget ~~ar~~ hornad ha tanet,
Mar stourm, chetu c'hwi nehét,
Ma ne ~~rō~~ avel ho pibenn
E chachit warnezi e ven;
Petra ~~lo~~ lammo a anken,
Nemed begig eur spilhenn?

Eur charater en eur greyenn
Pe skoliet en eur vouleyenn,
Gad petra en em ~~zikouro~~
Na gad petra eh avañso
Hag e gezeg hag e 'foenn,
Nemed gad beg eur spilhenn?

Deah e welis eur bugel
O klask chaokad bigerniel;
Paoträgt, dell, kemer eur spilhenn
Ha goude-ze gra evelen?
Hola! eme ar paoträ laouen,
Vive begig ~~xxx~~^{ho} spilhenn!

Na glaskit ket taboulinou
Da ~~zevel~~ paoträgtigou,
Na da ~~zevel~~ skolaerien;
Chetu amañar gwir voyen:
Plantit sioul en o ~~xxxxx~~^{'eskekenn}
Begig, begig eur spilhenn.

Bun den o vond da besketa
A vo fae braz ganta
Klask eur fusuill pe eur zabren;
Petra ~~gixxx~~ a glasko ta va den?
Eur prefvig, pe eur gelienenn
Lakst war beg eur spilhenn.

~~xxxxxx~~
~~xxxxxx~~
Mar chom gad an dud aviziou
O ~~xx~~ buhez hag o madou,
A gement-se int dleourien
Aliez da veg eur spilhenn,
Ha chetu amañar ar breuvenn;
Vive begig ~~xxx~~^{ya} spilhenn!

En noz ataket ti eun den,
Ekemer eur bistolenn.
Chat! Stouvet e toull an oaled!
Henn distouva eta zo red.
Biken er-meaz ne da e denn
Nemed gad beg eur spilhenn.

Eur weach m'en-deus gad eur spilhenn
Distouvet touli ~~ar~~ hreunenn,
En avañs hardi, hag e tenn;
Al laeron spontet en em denn.
E vuhez hag e voyen
A dle da veg eur spilhenn.

3

Evel-se ne weler archer,
 Fuzilher na kanolier
 N'o defe stag gad eur jadenn
 Out o abijou eur spilhenn;
 Hag eun arme a gant mil den
 A houlenn kant mil spilhen.

An nadoz a zo demezell
 Ganet a lignez uhel;
 C'hoant le-dere da lavared
 Ez e kar-tost da Bourbonet,
 Ha gouskoude e rank goulenn
 Sikour out beg eur spilhenn.

Al labourer, ar pinvidig,
 An artizan reuzeudig,
 Ar jeneral er hombajou,
 Ar roue e-penn e stadou,
 E pep afer e klask pep den
 Tenna begig e spilhenn.

Eur halvez a raio eur harr,
 Eur hilhorou, eun alar;
 Mez evid ober eur spilhenn
 Ez eo kaoud tri zen;
 Meur a hini a zreb bara
 Ne ouzont ket an dra-ma.

Unan a dailh hed ar spilhenn,
 He eeun hag he hemPenn;
 Gad neud lêton en-dro d'he fenn
 Eun all a ra eur gurunenn;
 Eun all out eur mén-higolenn
 A lemm begig ar spilhenn.

Evel-se en em zivuzen
 O rima war eur spilhenn;
 Beg he-deus, gwir e, va spilhenn,
 Mez n'e biko den birviken.
 Vive eta evid biken,
 Vive begig va spilhenn!
